

An heol a zo ku - zet, Se - tau e chu an de,  
 Me glev ar c'hloc'h o tin - tal an A - ve. Kousk, Kousk, Breiz-I - zel bro dis - par ;  
 Sethu an noz o tond war an douar Kousk, Breiz-I - zel bro ken mad,  
 Mouez ar mor braz a zav d'az luskel - - lat.

An heol a zo kuzet, sethu echu an de,  
 Me glev ar c'hloc'h o tintal an Ave.

DISKAN

Kousk, kousk, Breiz-Izel bro dispar  
 Sethu an nez o tond war an douar,  
 Kousk, Breiz-Izel bro ken mad  
 Mouez ar mor braz a zav d'az luskellat.

C'houez vad ar parkou glaz, hag al lann alaouret  
 Gant ar gliz noz war ar maeziou a red.

Ar Vesaerien a gan o tastum o loened,  
 Gwerziou Bro-Vreiz ne n'int ket c'hoaz kollet.

En traoniennou didrouz, me glev mouez an eostik,  
 Telenner-noz kanet flour ha dousik.

Uz da Vreiz o kousket an nenv steredennet  
 A lâz ez eus eun Doue d'hon c'haret.

An neb a c'houez bemde a c'hone e renoz,  
 Vid an dud vad Doue 'neuz graet an noz.

Arvor, o douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,  
 N'euz bro a bed ken kaer war an douar.

BLEI LANNVAU.

## PELL A VREIZ-IZEL !

Andantino Vale lente.

Pell a Vreiz - Lel ma bro ga - ret, Pell deuz he ne, Ma c'halon baour a zo  
 Kaer am euz bale ha redek bro Dre holl ar bed, N'al - - lan ka - vet le ve-  
 DISKAN  
 glac'ha - ret, Ha trist i - ve ma e - ne. N'euz fors pe - lec'h e tre - me-  
 nez eun dro Pell a Vreiz- I - zel ka - ret.  
 nan, Me zo di - vro - et, O ma Dou - e penoz e ve - van, Pell a Vreiz- I -  
 zel ka - ret!

Pell a Vreiz-Izel, ma bro garet,  
 Pell deuz he ne,  
 Ma c'halon baour a zo glac'haret  
 Ha trist ive ma ene.  
 Kaer am eus bale ha redek bro  
 Dre holl er bed,  
 N'allan kavet levez eun dro  
 Pell a Vreiz-Izel karet.

DISKAN

N'euz fors pelec'h e tremenan,  
 Me zo divroet,  
 O ma Doue penoz e vevan,  
 Pell a Vreiz Izel karet.

Bet on bet en Pariz hag en Rom  
 Ha pelloc'h c'hoaz,  
 Redet am euz dre ar broiou tom  
 Heb bout eürus biskoaz.

Er Franz, er Spagn, en Bro ar Saizon,  
 Meuz baleet,  
 Hag an hirnez a vroud ma c'halon,  
 Pell a Vreiz-Izel karet. Diskan

En Breiz-Izel em eus ma breudeur  
 Euz ma gortoz,  
 En Breiz-Izel 'ma ma dous seder  
 O ouela d'in deiz ha noz.  
 En Breiz-Izel en douar santel  
 Ma zad kousket,  
 Me ive na c'houllan ket mervel  
 Pell a Vreiz Izel karet. Diskan

Eflam KOAT SKAO.